

O clêvet ar propos-màn en devezs prononcet,
 E fatiqas he c'halon d'an Duques e bried.
 Setu o c'hompagnonet dezolet en antier,
 Ous o guelet immobil en ur memes amzer.

Sebelet voent ha douguet o daou er memes cambr,
 Elec'h ma voe vizitet gant an dud excelant
 A dleys en exanti eus ar maro cruel,
 Penevert ma voa stôet dre un tol qer mortel.

Pa ve piquet ar galon e ranqer perissa,
 Netra n'en devezs goude capabl da rezista;
 An ol Chirujianet o devezs lavaret:
 Pa ve blesset ar galon n'en eut muy a remed.

Clasqet e voe ur Bêleg da zonet var e dro,
 Hac e cōvessa gantàn ractal e bec'hejou;
 Recco e Zacramanchou gant henor ha respet:
 Caera consolacion da vont divar ar bed!

Casset voe ur messajer ractal en dro da guær,
 Da diguemen d'ar Roue, d'e famil en antier.
 Da anonç ar c'hêlou trist, ha dont d'e azista,
 E crede e voa ar Prinç en e heur diveza.

En em assabl a rejont, ha dont en ur momet
 E vete d'er bizita gant glac'har ha regret,
 Ha pa êrujont gantàn e parlante oute,
 Bete'r moment diveza ma rentas e ene.

Qenta mennat a c'houlén, pa êrujont gantàn,
 E voe d'e assasiner da rêy e c'hraç dezàn,
 Na vije qet condaonet da zouffr ar suppliciou
 A guement en laqaje da zouffri ar mare.

Hor Zalver en eus souffret calz eus a boaniou bras,
 Goude scuilla e ol voad, eo marvet var ar Groas,
 Da brena hon eneou, entrezomp, pec'herien,
 Hac en deveus pardonet d'e vrassa bourrevien.

O clêvet a preposiou en eueus prononcet,
 E respontas ar Roue : n'en em chagrinit qet;
 Laqit oc'h oll gonfanç en madelez Doue;
 Conservit deomp ho puez; goude ni velo ze.

E bried a recomand d'e famill en antier,
 Da gavet soign anezi ha demeus ar buguel
 Zo entre he daou gostez, pa deuyo var ar bed;
 Rac êru eo an amzer ma vezimp separet.


Hac e verc'h a recomand d'an Duques d'Angoulême,
 Da ober dêy acquitta he dever a gristen,
 Ha cavet soign anezi qeita ma vo er bed,
 Hac e vezo gant Doue un deiz recompancet.

Ar respont a ro dezàn an Duques d'Angoulême,
 Entre ma vo en buez, ne vanqo birviquen
 Da ober dezi beva en carantez Doue,
 Ha d'e derc'hel en doujanç, bete fin he bue.

Pa zantas e voa êru en e heur diveza,
 Ec'h ordrenas ma vije pelleet dioutâ
 E bried qez glac'haret, m'en dije an amzer
 Da c'houl pardon ous Doue, qent donet da vervel.

Peb Christen mad a vije touchet o c'halonou,
 O clêvet an Duc de Berri, qent souffri ar maro,
 O qimiadi truezus eus e famill antier,
 Qent ma zeo bet surprenet gant ar maro cruel.

4
 Pebes desolacion evidomp, Francisien?
 Collet hon eus ar Prinç mad voa capabl d'or zouten,
 Goulennomp a vouir galon ma vezo curunet
 Gant Jesus hac ar Verc'hez en pales an Drindet.



G U E R Z

*Var sujet an distro eus un Den Yaouanq partiet
 gant ar Reqizicion gentu.*

Var ton : Va Flaneden so caled.

TOSTAIT oll, tud yaouanq, ha qemerit true
 Eus ar blaneden bonner a boez var va bue :
 Deut da gemesq ho taelou assambles gant va re,
 Da zoulaji va foaniou, deut da voela varne.

Setu deg vloaz tremenet ma zon bet contraignet
 D'abandoni va c'herent, va douç, va mignonet,
 Evit monet d'ar brezel da zeugen an armo
 E faveur al liberte voa prometet d'am bio.

Abaoue qeit-al amzer, ne alfen qet laret
 Pet combat ha pet poaniou am eus-me anduret.
 Tri c'hant leo an zepare eus va c'herent nessa,
 Ha ne meus bet anezo qêlou an distera.

E creis ar c'harnach bemde va buez exposet,
 Unan demeus va divrec'h erfin am eus collet,
 Hac evit ol recompanç emeus bet va c'honje,
 Hep caouet neb pansion da veva em c'hontre.